

KANTIK SANTI VAUDE

8 N 2 - 3 - 036

Ton: Iliz Plouzeniel.

DISKAN

Pedomp, gant fel ha karante,
Pedomp an Aotrou Sant Vaude,
Ma hellimp, ganthan kennerzet,
Var he roudou bepred' kerzet.

1

Sant Vaude breman ken brudet
E bro Irland a oa ganet.
He gerent, tud a renk huel,
A oa ouzpenn kerent santel.

2

He gerent, sklerijennet mad
E kenver deverlou ho stad,
A boante, guella ma c'hellent,
Da gass ho dek bugel da Zant.

3

O Sant Vaude, dre ho peden,
Sikourit ar gerent kristen
Da zevel mad ho bugale,
D'ho zevel e doujanz Douc.

4

En he vam-vro, 'n eur manac'hti,
Sant Vaude 'reas he studi;
Eno 'gavas deskadurez,
Fia guelloc'h c'hoaz: guir zantelez.

5

He holl amzer he yaouankiz,
E chomas divlamm e pep giz;
D'he vignoned, da dud he gad
Ato e roë skueriou mad.

Ra vo yaouankiz Breiz-Izel
Ouz Sant Vaude ato henvel,
O tiwall ato aketuz
Euz an holl bec'hejou mezuz.

7

Dloc'htu 'n he vro, eur veich belek.
E poagn da goëz ha da brezek;
Eno avad ne chom ket pell:
Doue hen galv da Vreiz-Izel.

8

Daoust pegen poanluz e kave
Kuitat an holl dud a gare,
Setu ar Zant treuzi ar mor,
Ha dont var eün varzu Arvor.

9

E Breiz-Izel pa zigoueas,
Du-ma du-hont e prezegas,
Hag aliez dre vuzudou
E oue kresket nerz he gomzou.

10

E kement léc'h ma prezege,
Kalz tud d'he glevet a rede.
Gant pebez fel, pebez respet
Gant hon tadou ou silaouet!

11

O Sant karet, grit domp ive
Silaou ervad komzou Doue,
Hag ato heuilha peñn da beun
Kenteliou mad hor beleien.

12

Beva 'rëas pellik amzer
'N eur barrez tost da Landreger;
Da bedi, d'ober pinijen
Hen doa choazet eun enezen.

13

Ni evelloc'h, o Sant Vaude,
A boanto da bedi benede;
Ni zalc'ho mad da lezennou
Ar c'horaiz hag ar vijilou.

Daoust ma veve 'n eul léc'h distro,
Eur bobl-tud vize var he dro
Lod e zeue da glask yec'hed,
Lod all skueriou a barfeted.

15

Sant Vaude, dre ho pedennou,
Deut d'hor zikour en hor poanlou,
Goulenit domp digant Doue
Yec'hed ar c'horf hag, an ene.

16

'N eur zigoueout en enezen,
E kavas enni a vanden
Prenved donjeruz, pe aëred:
He beden 'rëas d'ê tec'het.

17

Pa glask ar serpent milliget
Hor guall flemma dre ar pec'hed,
Mirout outhan, o Sant Vaude,
Da roi ar maro d'hon ene.

18

Pa zeuas ar Zant da vervel,
E oa he ene ken santel,
Ken brao guisket gant vertuou
Ma savas var eün d'an Envou.

19

O Sant Vaude, pa vimp, d'hon trô,
Skoët eun de gant ar maro,
Grit ma hellimp, gant ho skoazel,
Kaout ive eur maro santel.

20

D'ho chapel, gant devosion,
Omp dent, da zevez ho pardon,
Da henori ho relegou
Ha da veuli ho vertuou.

Imprimatur:

Quimper, le 4 juin 1903.

F. CORRIGOU, Vic. gén.



air: Iliz Plouzeniel

LE BRIS



Harm. M. LOZAC'HMEUR

29690 Plouyé